





Da "Dereza ar Mabig Jezus"

(Bokedik' a Zoujans)

pp. ✱




E - tre ar bed hag an Nen - vou




Eur ro-zen a zo di-wa-net, eur ro-zen ken splann

ff.




he de-liou E - vel an erc'h ne - ve goue - zet.


Diskan ff. **Bien chanté**



O Te - re - za ael a be - den !




Rou - a - ne - zig a dru - ga - re. Chi-la-ouet ar



galv - a an-ken A gas ar bed' tre - zek Dou-e. ✱

II

Ar Mabig Jezus he hadas
N'eur gouent didrouz ha zantel
Nao bloa eno e « tizelias »
Dindan he dreid glan a vogel.



III

Pell re gaer evit hon zraouïen,
Ar vleuen a zec'has, eun de,
He zroad e dour ar binijen,
Teuzet gant heol ar garante.

IV

Jezus, al Liorzer divin,
A gutuilhas e vokat roz,
Leun a c'houez-vat, a c'hliz-mintin,
'Vit balzami ar Baradoz.

V

Met aboe, 'vel eur « glao » dispar,
D'an disteran mennad a fe,
Eus an Nenvou war an douar,
Deliou roz-gwen a goue... a goue.

VI

O Tereza, ael a beden !
« Rouanezig » a drugare,
Selaouet ar galv a anken
A gas ar bed trezek' Doue.

VII

Savet, diskennet « hep repoz »,
Deut da louzaoui peb glac'har ;
C'houi hag a lak « ho Paradoz »
D'ober ar vad war an douar.

VIII

Goulennet true da Vro Frans,
Gwalc'het gant goad he merzerien.
Goulet ma savo gant fianz
Da heuil banniel ar fe gristen.

IX

Ha da c'hoant devus ho kalon,
Jezus a blego, marteze !
Hen a rei d'imp, gant e bardon,
Eul loden eus ho karante.

KOULMIG ARVOR.

Musique de Jean Fuloen.

TOUS DROITS RÉSERVÉS.

IMPRIMATUR :

Brioci, die 31 Maii 1941

E. LE BELLEC,

Vic. gén.